

Ar Gernez bras
(1816)

Gwerc'hez gloriis Vari, Rouanez an Elle,
Obtinit dinn me o suppli sklerijen deus an eñ,

Vid ma hallin diskleria dirag ar Vretoned
Eur gwirionez exemplus a nevez erruet.

Glao hag avel, a kurun, ken a lake spouroun
en kalon kement- hini en devoa an uzach a rezon

E pad an deïchou ma voa an amzer direnjet
Sellaouit assistantet petra zo erruet.

Gant eun uzulier ingrad e bars e neur marc'had
hag eur paour kes artisan o prena eur sac'hat

Gred e voa ar priz a nezan ma zinn bed akordet
Pa he komtet an arc'hant a vanke daou wennek,

en devoa lakeet ar paour da kaout eun tam bara
a ma voa en he c'hodel ma vellas anezan.

An ed pe an daou wennek a vanke en arc'hant
Pe voa lib de verza da eun all presentamant

Senti ra ar paour outan e reï a ra dezan
a beuzet e zaou lagad diskregi a nezan.

Neuze p'an deveus paët, deus ar paour gant an ed
Da gaout ar vilin tosta, evid pourva he boued.

Pa ze mallet a poazet e ze daouc'hementet
Dre bermision Doue, hag or mam biniget.

hag an uzulier a ïeaz Da ober e zouben
ma teuas bara ar baour enon var he varlen

e c'hober he skudellad dindan ma voa trempet
e troë ar boëd 'n arc'hant a ma voant estonet

setu e naon o kreski e galon e fallad
a ma c'houlenas bara d'ober e skudellad

Kaer en devoa goulen boued e zent tout en arc'hant
evid ma teuche da anaout e grim viziblamant.

Kuitat a eure ar ger ze evid monet d'ar ger
Dond a ra da ensensi(1) a mond en dizesper.

Brema e komter eo ead d'ober pinijen
Da prometi ne rai ket kement all birviken.

An dra man nen deo c'hoas nemed komansamant
Da gomta zo erruet evid ar bla present.

eur baourez kez intanvez gant pemp a vugale
ne vouie e neb fesson kaout boed da reï deze

a ié bemdez da eur park a voa en he c'hichen
a ma tigasse gati eur golén.

Perc'hen ar c'holl a deuas eun dervez da valle
O c'hantren en ho meskou o velled nombr a ne

a ma teuas d'ar ger e lavaras de vevel
Red a vezo did monet dre aze dre ar c'hontre

evid kleved gant piou e vezint ed.

Dever eun domistik mad eo senti oc'h e vest
O receo komandamant e c'haboïssas prest.

A pakat an deveus-hi o tisken divar ar c'hleus
gand eur gollen drohet.

— C'houi eo sur emezan an hini en deus karnajet
ar pez zo gred en dachen, divoalit mar keret !

A ma did ken brema ag a reffet er vad
Rag me a voa diputet evid ho c'hevessad.

— ia va mignon emezi, en avoui a ran
ar bedervet varnuguent a ia gane breman

a bed-hon on o c'herc'het pevar devez varnuguent
 a n'em moa ken da breja nemeto entre pemp.

Pa erruen er ger e touez va bugale
 e tistribuen e loden da beb hini a ne,
 a mo drebrent e kris dre ma voant faminet.

Retorn a ra ar mevel d'ar ger e neur wella
 Da gaout e vest eb appel ma c'houlenas outan :

Deud din va gobr, emezan pa meuzi gonezet
 Mo hassin d'an intanvez ma hallo kaout boued.

— O neket awoalc'h kement-se mez me a ia ive
 hag a zigasso gane daou deus he bugale

ag a zalc'ho mad dezo ken a allin kaout boëd
 gant Doue ag ar werc'hez evezin rekompanset.

Moris Follezour, 17 meurs 1851.

(1) Peut-être faut-il lire : exsensi ?